

Ar Seiz Avel



EUR VAOUEZ KOZ...

Gavotenn eus Kastellin

I 09 ab

Eur vaouez koz e-kost' eur we'enn
 Ha houic'h ! c'hrin ! c'hrin !
 Ha houic'h ! c'hrin ! c'hrin !
 Eur vaouez koz e-kost' eur we'enn
 O tastum tout ar per melen.

II

Ha me kemer ma baz gati.
 Ha chet eur maen da outi.

III

Ha touch anei war benn he skouarn
 Ha blasa d'ei penn he houarn.

IV

Ha me a dao ! da Gastellin
 Da glaska d'ei ar medistin.

V

Ar medisin e-pad oa deut
 A blasa d'ei penn he viz meud.



VI

Ha taol anei e-war ma skoaz
 Da gas da veilh da vala.

VII

Ha da veilh pa oan erruet.
 Me oa bras estonnet.

VIII

Evel mogeriou graet gant yod
 Hag al lorzi gant laez ribod.

IX

Ha taol anei 'barz ar gwele
 Ha mont 'semblez ganti ive.

X

Eur giezenn zu o tont en ti
 A gas ma boutou ganti.

XI

Ha 'ma loerou 'zo aet g' ar c'has
 Ha setu me a zo e noaz.

Chanté par Nicolas Suignard,
 28 ans, originaire de Châteaulin
 (ferme de Ker-Moëk).

Recueilli par Nevezadur, 1941.